

Perrinaïk Lanhuon

Er bloaz mil eïskant ugent pevar ugent a pemzek
er ger a Lanhuon er malheur zo erruet

e hez arruet eur malheur er ger a Lanhuon
Pini a renk lavaret kalz a dud a fesson

Gant Daou maltoutier iaouank e nem geff da goania
evid terri ar faven e nem divertissa

Po doa drebet ag evet ag ho skoden paët
ar vatez Perinaïk o deveus goulennet

Ar c'hreg man a i(o)a eur c'hreg vad karget a vadelez
Ag a hellum ar goulou e letern d'he matez.

— Dellit-ta Perrinaïk dellit ar goulou
id da ambroug an otronez dan ec'h gant ar ruiou

— Mar karoc'h Perrinaïk senti oc'h or c'homzo
C'houi a vouche o letern a laze o koulou.

— Penos emei otronez mond d'ho kass dar ger
Pa me mouchet va letern a lazet va goulou skler

— Mar karfer Perinaïk dond ganeomp-ni d'on-ti
ni roffe deoc'h da tava deus an tri sort gwin.

— Sallokras otronez o trugarekad a ran,
e ti va mestrez Beuvan, pa garan e hevan.

Sonnet an anter noz lavar an aotrou d'he briet
ar vatez perinaïk d'ar gear ma zistro ked.

e kijen gouent Sant Joseph eo he heffchont maro
ar goulou en he letern dirazi a zo beo

— O va matez Perinaïk ni a zo glaharet
O velet pebeus malheur ganeoc'h zo erruet.

Rag c'houi voa eur plac'h onest ag eur plac'h a fesson
Braoa plac'hik ar varche var baveou Lanhuon

Er chapell Santez Anna e man e foltret
ar goulou en he letern dirazi a zo marvet.

Catherine Laninor. Taulé, 3 mars 1851.